

# GWERZ YAN GOMBOT

Cuillotinet e Montroulez

D'AR 28 A VIS EBREL 1893



*Var un ton trist*

Drindet Sorak ag Adorabl, pedan d'am assista,  
Da rei din ar sclerijen ar gallout da rima,  
Oll circonstansou, daou grim pere so cometet,  
Gant eur galin dinatur, gant satan posedet.

An arc'hant a so tentus da gals bars er bed man,  
Dre o sujet kometer, krimou an horupla,  
Nemet vit e Breiz-Izel neuz biscoas kometet,  
Ken horrubl ag ar reman, zelaouit bretonet.

Evit rei va guenvroiz, scler deoc'h oll da entent,  
Bars er bloavez mil-eiz-cant-daouzec-a-pever-ugent,  
Entre an un ag an daou-var-n'ugent a vis maë,  
Diou leo euz kaer Montroulez bars e pares Taule.

E neus ranket cristenien, diou blac'h kes finisa,  
Ho buez dre eur maro meurbet sur a trista,  
Pa int bet diou verzerez aman var an douar,  
Ho c'hine so o repos, gant Jesus en he c'hloar.

Yan Gombot var dro dek heur, sioas demeus an nos,  
D'ar c'houls ve dud a zoare cazi oll o repos,  
A savas deus he wele dre nerz an drouk speret,  
Et da di Françoise Jafres gant coler dirennet.

Pa nem gavas ar muntrer, bars e kichen an nor,  
Eus he merc'h Jeannie Tanguy e c'houlennas digor,  
Jeannie anavezaz mad mouez breur-ker he breur,  
Zigoras dezhan an nor, var he brassa malheur.

0003

Kerkent ma oa Yan Gombot, bars en ti antreet,  
Evelen d'ar plac'h paour man raktal neus lavaret,  
Prest din ar som a zek liour, breman deus-tu Jeannic,  
Pe autramant e rankas, donet da eureuji.

O! Gant eur seurt prepojou homan oa spouronet,  
He goad oa deut da frima, ag he c'halon mantret,  
Sortiet oa eus an ti, neur grena prontamant,  
O klask espern he buez eus griffou an tirant.

Mes ar monstr deus an ifern, a neus bet e c'heuillet,  
A tregont pas eus an ti neus bet c'he aretet,  
Gant un tol dorn et tiskar anezhi d'an douar,  
Neuze dre nerz he goler teuas c'hoas ar barbar.

Da gemer eur menn pouner, vit frika d'hei he fen,  
Ken a strikas c'he c'hepen, pell onthi cristenien,  
D'an oad eiz vloas a tregont vel-ze Jeannic Tanguy,  
Deus finiset he buez dre ar verzerenti.

Yan Gombot a retornas, da ti neuze goude,  
Leac'h oa intanvez Tanguy kousket en he gwele,  
A gant un er divergont, neus bet lavaret dezhi,  
Deut deus ho kwele Francoise, breman da goms ou rzhin,

Kerkent a ma oa savet er meas eus he gwele,  
E tapas krok en he bleo, evel eul lyon gouë,  
A kre eus men an oalet stropas dezhi he fen,  
Ma commansas kol he goad, ag he memor zouden,

Sonjal rei d'hei buanoc'h neuze an tol marvel,  
N'he gouzouk betek he zro-ad. e plantas he gontel,  
Pa neus neur stad ken kruel, ar plac'h man masacret,  
Ar goad demeus he zaouarn, Combat neus bet goalc'het.

Goude oa bet nem laket, da furchal ar prejou,  
Ezom e nevoa arc'hant da eva banac'hou,  
Dek-scouet a pevar-ugent a neveys bet laeret,  
Neuze partias contant, d'he whele da gousket.

Françoise so bet he buez, goude oa masacret,  
Vardro un devez anter a neuze bretonet,  
Da naontek vloas tri-ugent dre sujet an den kri,  
Neus finiset he buez koulz vel he merc'h Jeannic.

Ar c'hrimou so cometet et bilagen Braquen,  
A François ar Guyader, oa joaus cristenien,  
E vonet d'ar zul vintin neuze da gerc'het les,  
Da di an diou verzerez leac'h ma ze alies.

Kerkent ma oa an den man bars en ti entreet,  
He oad oa deut da frima ag he galon mantret,  
Ractal neus bet remerket intanvez an Tanguy,  
Merzeriet gant Combot, eno var ar leur zi.

Da un he amezien neuze neus lavaret,  
Dont buan e ber amzer kouls ag he da velet,  
Daou grim eus an terrupla, gret gant dorn eur barbar,  
Pere lakje da grenn, an Elez bars er gloar.

An diou blac'h so interet bars e beret Taule,  
Laket gant kals a respet ho diou er memès bez,  
Ag eno breman e chomfont rag ma rankomp renta,  
Hor c'hont d'hor Salver Jesus, en traonien Josaphat.

Combote oa kerc'het teir gwech da brison Montroulez,  
Diou wech dre urz ar justic, oa bet leusket er maes,  
Pa ne oa ket an testou he a nac'he bepret,  
Lake justic a polic, d'ocupi ho speret.

Pevar mis met pep devez e zeo bet ar muntre,  
Derc'hel da nac'h he grimou, ebars en he gartier,  
Deut e oa bet da scuiza o veva n'he bec'het,  
Da zisolo ar c'hrimou an heur oa neur gavet,

D'ar zeitek vis guengolo Combote en he brison,  
A nevoa bet kemeret ar resolution,  
Da zonet da nem grouga ma nije bet gallet,  
Vit ma chonje he grimou dindan soupson ar bed.

Dre c'hras ar gwir brovidans, va Jesus va Zalver,  
Pa oa c'hessa nem grouga, neur gavas ar solier,  
Neus bet empechet Combote da veza nem grouget,  
Ar procureur var a leac'h, ivez so erruet.

Ag an aoutrou da Combote neuze neus lavaret,  
Deut oc'h da scuiza Combote, o veva n'ho-pec'het,  
Breman e c'houzon patan eo c'hui ar gwir frayen,  
O peuc'h-cometet daou grim, e bilaje Braquen,

la me eo ar c'hruella den so gant mam ganet,  
Ambuzet meus va douarn, da ober daou dorfet,  
Me eo bet ar c'hriminal, me so un den infam,  
A meus leusket da redek, goad ar verc'h goad ar vam.

He c'hoar brobr ag un den all neus goude akuzet,  
Da veza velthan coupabl, er c'hrimou kometet,  
Deut c'hoant dezhan da asten he vuez er bed-man,  
C'hoant lakad tud e injust da vervel evelthan.

Dre man neuz bez lavaret nevoa ivez complis,  
Er prison raok oa barnet, eo bet var dro eis mis,  
Neuze e fin mis guenver, oa galvet da Quimper,  
Pevar dest a daou ugent, vit sujet an afer.

Da daou eus a vis c'hwerveur, neuze ar c'hour d'assis,  
O neus bet gret o dever a rentet ar justic,  
Evel ma deus bet klevet, eno an oll destou,  
Ar c'hour o deus bet barnet, Yan Gombot d'ar maro.

An taol deus ar guillotin, da souten so pouner,  
Dre-ze dar soursen ar c'hras c'hapellas he affer,  
Eno oa kavet ivez ken kruel he grimou,  
Ag evel bars e Quimper oa barnet d'ar maro.

Breman evit Yan Combot, an heur so tremenet,  
Pa neus ket gallet derc'hel, he grimou hras kuzet,  
Dre nerz kre ar guillotin, ag an aotrou Deybler,  
Neus finiset he vuez ebars e ber amzer.

Var blasen Sant Nicolas, a us kaer Montroules,  
E zeo bet peet Combot eus he fallagries,  
D'ar 28 eus a vis ebrel bars er present,  
E zeo bet guillotinet deur bloas ag anter kant.

Me o ped oll cristenien breman neur finisa,  
Bevomp oll en union, greomp vad d'hon nesa,  
N'heuillomp ket buez Combot, en draouien man zaero.  
Pe velthan var ar potans, rankfomp soufr ar maro.

*Propriété de l'auteur et tout droit réservé,*

LE BRUN.

# KIMIAD AR C'HRIMINAL

Araog mont d'ar Maro



TON AR ROUE GRALON

Me o ped oll tud va c'hontre,  
Dreist oll habitantet Taule,  
Selaouit oll fñwez eur barbar,  
P'hini a lavar gant glac'har.

Allas a nep a so ganet,  
Dindan eur blaneden galet,  
Ma nellont ket dont d'he zerri,  
Deus n'ho' buez mellankoni.

Sioas me a meus em buez,  
Mellankoni tristidigez.  
Pedet Doue he vam Marie,  
Ne po ket un henvel onthi.

D'an oad eur bloas ag anter-cant,  
Dre ma c'hon bet eur gwir dirant,  
A greis va nerz a va yec'het,  
Hon forset da guittad ar bed.

En ho presans kos a yaouank,  
Breman dre eur gwel chatimant,  
Evit ransoni va c'hrimo,  
Me so e vonet d'ar maro.

Va daouarn meus bet ambuset,  
Ia ! da gometi daou dorfet,  
Merzeriet diou femeuleh,  
Pebeus daou valeur cristeinien.

Va diou scouarn meus bet prestet,  
Da zellaou mwez an droug speret,  
A gret neuze-scouarn vouzar,  
Eus mwez nerzus roue ar gloar.

Pardon ! Pardon a c'houlenan,  
Eus kement den so er bed man,  
Ma ne meus bet ofanuset,  
Dre va gwel vuez direglet,

Pardon ! Pardon tud va c'hanton,  
Ma fardonit a wir galon,  
A Doue dre wir garantez,  
O pardono goude ivez,

Karget e meus dre va c'hrimou,  
A c'hlac'har bras ho kalonou,  
A va c'herent dishonoret,  
Entre ma chomfont bars er bed.

Pebeus kalonat vit va mab,  
Pa sonjo e maro he dad,  
A rank breman dont da vervel,  
Dre eur maro se ken kruel.

Adieu did va mab dre speret,  
Va muia karet bars er bed,  
Breman kenn sur da zaoulagad,  
Ne helfont mui gwelet da dad.

Adieu ivez a lavaran,  
Da gement so presant aman,  
Adieu kerent a mignonet,  
Kenavo d'eoc'h oll bretonet.

Goude ma c'hon bet eur muntreer,  
Me o ped oll tud va c'hartier,  
Da gavet goude va maro,  
Memor ouzin d'ho pedennou.

Leret pa zefet da ofis,  
Eur bater pe deprofundis,  
Evit goulen digant Doue,  
Ar repos evit va c'hine.

Breman e neur vont d'ar maro,  
Pardon va Jezus va Aotro,  
Me gred c'hui dre ho passion,  
Accordo demp oll ar pardon.

*Propriété de l'Auteur et tout droit réservé,*

LE BRUN.